

J E Z U Z H A B R E I Z

# K A N T I K

## B U G A L E B R E I Z - I Z E L

## Z A N D E R V O A N

WAR DON : *Ar Mousik bian.*

Azo ar Genkiz a lere

D'he mab Ervoan Kervarzin :

« Mabig, emei, noz ha beure,

» C'houi bedo war ho taoulin.

» Laret zo d'in abeurz Doue,

» Pe oae'h bian, ma bugel:

— « Da vab Ervoan a vo eunn de

» Eur zant braz enn Breiz-Izel. »

*Otro zand Ervoan binniget,  
 Ma zand Ervoan Breiz-Izel,  
 Enn han Doue ma zikouret,  
 Ha me vo bete mervel,  
 Me vo eur zand, eur zand ive,  
 Evel ma oac'h enn bugel,  
 Hag eunn devez em o enn Ee,  
 Ma lod gand zent Breiz-Izel.*

*Ervoan a c'hoerze he lagad,  
 O klevet he vamm Azo,  
 Ha daoulinet tal he vamm vad,  
 A lere he bedenno.  
 « Mar am c'heret, o ma Doué,  
 » E leveure ar bugel,  
 » A vo Ervoan eur zant neve  
 » D'he vroik keaz Breiz-Izel. »*

*Aked vraz hen ee bemde  
 Da lenn bue zend ar vro,  
 Ha goude pedi a gleske  
 Ober evel-t-he d'he dro.  
 « Reit d'in, ma Doue, emean,  
 » Adalek ma on bugel,  
 » Roet d'in ar c'hras da vean  
 » Eur zant vel zent Breiz-Izel. »*

*Ne gere netra barz ar vro  
 Vel he iliz Landreger :  
 Enn osern hag er gouspero,  
 Ervoan a gane zeder.  
 « Eunn de a vo, ebars ann Ee,  
 » E leveure ar bugel,  
 » Hag e kanin gand ann Ele  
 » Ha gant ma zent Breiz-Izel. »*

Gwelan a re o kimiadi  
D'he vamm Azo ar Genkiz,  
Gwelan 're d'he dad Helori  
'N eur vond da skolio Paris.  
« Da Baris ma renkan monet,  
» E levele ar bugel,  
» Enn Paris, me vo fur bepred,  
» Vel em broik Breiz-Izel. »

Ne oa ket mesk ar iaouankiz,  
O ! nan, ne oa ket unan,  
O studian enn ker Pariz.  
Furoc'h vit ma oa Ervoan.  
ENN Paris kerkoulz hag er vro,  
N'ankoueaz ket ar bugel  
Pez a lere he vamm Azo,  
Pe oa 'nn he vro Breiz-Izel.

ENN Breiz-Izel, o ma Doue,  
A zo c'hoaz kalz a vammo  
Hag a lavar d'ho bugale,  
Evel ma lere Azo.  
Ha pe 'ne gret he bask kentan,  
E leront hi d'ho bugel :  
« Deut, bugel, deut da bardonan  
» Da zand Ervoan Breiz-Izel. »

« N'onn pera vefet 'nn ho pue,  
» N'onn pelec'h veet kaset :  
» Gand ober bolante Doue,  
» C'houi vo evurus bepred. »  
Evel se 'lavar ar vamm vad,  
O tonet gant he bugel,  
O tonet da westan he mab  
Da zand Ervoan Breiz-Izel.

ENN KICHEN HE VAMM DAOUINET,  
ENN CHAPELIG ZAND ERVOAN,  
AR BUGEL KEZ HEN EUZ LARET  
VEL ERVOAN, PE OA BIAN.  
» OTRO ZAND ERVOAN, EMEAN,  
» ME N'ON NET EUR BUGEL :  
» EVEL D'HOC'H ME GARJE BEAN  
» EUR ZANT D'AM BRO BREIZ-IZEL.

» GANT MA VO BOLANTE DOUE,  
» N'EUZ FORS PELEC'H VIN KASET ;  
» N'EUZ FORS PERA VIN EM BUE,  
» ME A VEZO FUR BEPRED.  
» ZAND ERVOAN, C'HOU AM ZIKOURO,  
» ADALEG MA ON BUGEL,  
» HAG EUNN DEVEZ 'M OENN ENVO  
» MA LOD GANT ZENT BREIZ-IZEL. »

MA JEZUZ, MIZERIKORD !  
KALON DEUZ A VARI, BEET MA ZILVIDIGEZ !  
SANT JOSEF, PEDET EVID-OMP !

(M. LE COR)

*Imprimatur :*

A. CHATTON, *vikel vraz.*

Sant-Brieg, 14 a viz mae 1883,

TRÉGUIER. — TYP. VE A. LE FLEM.